

# KROAZ



# BREIZ

## LENNIT AN DRA-MAN GANT EVEZ

- 1° — « Kannad Ar Vuhez Kristen » n'eo ket eur gelaouenn, met eur rollad levrioù a 32 pajenn.
- 2° — Moulet e vezo eun 10 niverenn bennak anezo bep bloaz.
- 3° — Kaset e vezint da holl lennerien goz « AR VUHEZ KRISTEN ». Ar re anezo a oa echu o c'houmanant, a c'hell koumanant rakta da « Kannad Ar Vuhez Kristen ».
- 4° — An dek niverenn a gousto :  
**Koumanant ordinal : 70 lur.**  
**Koumanant a enor : 80 lur...** pe ouspenn...  
gant perz e 365 oferenn, lavaret evit hor ma-  
doberourien.
- 5° — Pa vezo echu ho koumanant, e vezo kaset d'eo'h eur baperenn da baea evit eur c'houmanant nevez... Paeit raktal, mar plij !
- 6° — Ma ne fell d'eo'h reseo mui « Kannad Ar Vuhez Kristen », skrivit war ar golo : **refusé**, ha roit an niverenn en-dro d'ar « facteur ».
- 7° — Pa skrivit d'eomp, lakit pep tra fraez, aes da lenn ha da intent... Lavarit atao evit petra eo hoc'h arc'hant.

Skriva da :

**P. Eugène LE QUEAU,**  
Couvent des Capucins  
ROSCOFF (Finistère)  
C. C. 291-62. NANTES

Keraat a ra pep tra...  
Ker e koust d'eomp dreist-  
holl ar frejou-post... Ret  
eo d'eomp ivez keraat priz  
ar c'houmananchou :

**Koumanant ordinal : 70 lur.**

**Koumanant a enor : 80 lur.**



## “ Peoc'h war an douar d'an — dud a volonteze vat ” —



Eus ar bloaz a zo o tremen, e c'hellomp lavaret eo bet eur bloaz benniget evidomp, peogwir en deus lakaet eun termen d'ar gwsa brezel a zo bet biskoaz.

Pebez bec'h n'en deus ket tennet diwarnomp !

Goude kement a zismegans hag a reuziou, nag a boan o kredi e ve nijet pell diouzomp an hunvre fall-se, hor gwaske abaoe keit all !

Penaos e c'hellfemp ehana da drugarekaat an Doue bras en deus kaset pep tra da vat, en holl drubuilhou bet kouezet warnomp ?

Penaos ivez ne vijemp ket anaoudek e-kenver ar re o deus stourmet pe roet o buhez evit prena d'eomp ar frankiz hor heus hirio... ?

Ha, koulskoude, daoust pegen prizius bennak eo peoc'h an armou, rentet d'eomp, peoc'h ar sperejou hag ar c'halonou a zo pell c'hoaz diouz beza diazezet !

Klanv eo ar bed ! Enkrezet e chom ar broiou, a gen-dalc'h da zellout du an eil ouz eben. Enkrezet eur, a bep tu, ha, mar d'eo tavet trouz ar c'hanoliou, brezel a zo atao etre tud hag a dlefe en em glevet hag en em garet. Enkrezet, pe kentoc'h diempennet, e seblant beza kalz re a yaouankizou, ne zontont nemet er blijadur, pa 'z eus kement a ezomm da labourat evit adsevel hor bro rivinet...

Brasa droug, hep mar ebef, en devezo graet ar brezel d'an dud, eo disahela o c'houstians, laoskaat enni doujans Doue !

Pec'hed bras ar broiou, evel ar familhou, eo beza lakaet Doue er-mêz, eo klask reizha pep tra hepdan...

Ar peoc'h, er broiou, hag e kalonou an dud, ne vezo adkavet nemet o rei da Zoue ar plas a zo dleet : ar c'henta.

Ar peoc'h eo ar c'hontrol beo eus ar brezel, an enkreiz, an dismantr.

Piou lavaro morse a-walc'h pegen mat eo ha pegen bras eo e briz ?

Ar peoc'h-se, hag a zo d'e heul ar gwir eürusted, ne c'heller e gaout nemet gant eur goustians vat, gant Doue er vuhez hag er galon.

« *Hor c'halon, C'houi, o va Doue, ho peus he graet evidoc'h, ha n'eo nemet o tiskuiza warnoc'h, eo e kav an dizoan hag ar peoc'h.* »

Na mat eo d'eomp, en deziou-man, tostaat ouz kraou ar Mabig Jezuz, evit klevet e vouez, ha deski gantan ar gwir doare da gaout ar peoc'h, a vank kement d'hor c'halonou trubuilhet.

Hên eo prins ar peoc'h, ha n'eo diskennet eus an Nenv nemet evit degas d'eomp an tenzor-se, ha n'eus ket e bar e-touez holl vadou ar bed.

D'eomp-holl e lavar : « *ma c'hoantait ar peoc'h, me eo ar peoc'h-se, deskit ganen beza bihan hag izel a-galon, distagit ar galon-se diouz traou ar bed-man.* »

A ! hor c'halon baour, nag a ezomm da skarza anezi ha d'he c'hempenn !

Kalz re a draou a stank an hent ouz Doue, hag a vir ouzomp da danva ar gwir beoc'h, prometet d'an dud a volontez vat.

Ra zeuimp gant Nedeleg hag ar bloaz nevez da urzia gwelloc'h hor huhez evit kaout ennomp ar peoc'h, ne c'hell ket ar bed e-unan rei d'eomp, dre ma 'z' eo eun donezoun a-berz Doue.

L. B.



## PELL DIOUZ AN TROUZ.



Eur gêriadennig war ziribin eun dorgenn, koant da welout gant e ziez gwenn-kann, e-touez ar gwez glas, tro-war-dro d'ezhi parkeier karget a eostou puilh... setu Nazared, ar gêrig dibadet gant Doue evit beza bro e Vab en em c'hraet den.

Aman eo sioul pep den ha pep tra... En tiegeziou eo krog pep hini gant e labour. Mont ha dont a ra an dud dre an henchou bihan, dre ar gwenojennou, eun dra bennak d'ezo da ober dalc'hmat, a-hed ar bloaz, en o farkeier : douar da drei, eost da zastum, loened da gas war ar peuri...

Diouz ar c'hovell e teu, bep ar mare, eun trouzig sklintin... Du-hont eman ti Jozef, ar c'halvez. E vab a zo gantan en e stal-labour. E wreg a ra war-dro an ti...

Pegen didrous eo ar vuhez e bourkig Nazared. Divrud e vev an dud enni... divrud hag eürus evelato...

E-kreiz ar maeziou sioul e teuas Mab Doue da zeski e vicher a Salver ar bed.

E-pad tregont vloaz, hep gouzout da zen, e chomas eno da labourat ha da bedi, en eur c'hortoz an eur merket gant e Dad, evit mont dre ar Palestin da brezeg an Aviell. Biskoaz, e nep lec'h na gant den ebet, n'eus bet aozet eul labour bras bennak... e-kreiz an trouz.

Doue a blij d'ezan kement a zo sioul.

Boulc'het eo bet labour silvidigez ar bed e-kreiz ar sioulder...

Didrous e oa maeziou Betleem pa dregernas kan an Aelez a-us d'ar bastored kousket...

Didrous e oa ar c'hraouig ma voe gourvezet ennan ar Mabig-Jezuz...

Sioul e vevas e-pad 30 vloaz. Unan hepken eus e gomzou a zo deuet betek ennomp...

Sioul e chomas, e-pad e Basion, dirak glabouserez e damallerien hag e varnerien...

Sioul ha didrous o deus bevet ivez ar re wella eus e vignoned, ar Sent. Sant Erwan, patron hor Breiz, a zo bet pell person en eur barrezig war ar maez.

Santez Anna a zo en em ziskouezet d'eul labourer-douar divrud, en eur gêriadennig ken divrud-all, e-kichen Alre.

E-kreiz sioulder ar maeziou hag ar menezioù eo e teuas ar Werc'hez d'en em ziskouez da vugaligou diwar ar maez, e Lourd, e Pontmain, e Fâtima.

\*  
\*\*

Doue a gar ar pezh a zo sioul ha didrous.

An dud n'en em blijont nemet e-kreiz an trouz, ar safar, an toumpi hag ar cholori...

Pa gouezont klanv koulskoude e rankont tec'hout pell diouz an trouz, evit klask ar yec'hed...

Hag e-kreiz ar maeziou didrous e kavont ar yec'hed-se...

Yec'hed an ene a gaver ivez e-kreiz ar sioulder... pell diouz an trouz.

Rak eno e kaver ar C'hrist.

Hag ar C'hrist eo ar « Vuhez ».

TAD AL.

## Kudenn an dilezou.



Da dad, da vamm a enori  
Ha da vuhez a astenni...  
Madou re-all na c'hoanta ket  
Evit o c'haout hep gwir ebet...

### LEVE HA REZERVATION



Ar re goz, eme ar Rouziked, a dlefe derc'hel ganto atao an askorn bras.

« E gwirionez dereatoc'h eo gwelet ar vugale o tont da c'houlenn digant o zad hag o mamm, eget ar re-man o vont da astenn d'ezo o dorn ».

E bro Pleiben ha Kastellin e ya ar gerent peurvuia, pa vez bet graet an dilez, da chom, en o fart o-unan, a-wechou d'ar vourc'h, e-lec'h ma feurmont eur gambr pe ziu, a-wechou all d'eun ti bihan o devez bet prenet pe lakaet sevel evito o-unan, pe c'hoaz d'eun tiig anvet ti-rezervation, a gaver bepred e meur a lec'h war ar mêz hag a veze gwechall e kement tiegez koulz lavaret.

Ral a wech e chomont gant ar bugel a vez bet roet d'ezan ar plas. Gwell a ze n'eo ken, rak evel-se ne sav ket trouz etre ar menaj yaouank hag an hini koz. Er c'hontrol, tommoc'h e vezont an eil ouz egile alies, pa 'z eo gwir e laka an disparti ar garantez da greski. Hag e vez eun drugar gwelet dalc'hmata, e-keit ma vezont gouest da vihana, ar re goz o vont da sikour ar re yaouank, pa vez dervezioù bras a labour da ober en tiegez.

Evit heva, e rank an tad hag ar vamm kaout eun

tamm leve bep bloaz. Hogen, pep hini eus ar vugale, ha n'eo ket hepken an hini en devez bet an tiegez, a ro d'ezo ar pez a vez bet divizet war an dilez.

A-wechou, koulskoude, en devez perc'henn nevez ar plas diviz ouspenn da gas d'ar re goz, bep bloaz, eun tammig gwiniz hag ed-du, eur varrikennad sistr, eur sac'had irvin ha karotez, pe eun nebeud traouerez-all evel-se.

### E BRO AR CH'LAZIKED.



Setu aman penaos e tremen an traou e bro ar C'hla-ziked.

Ar vugale o devez o lod en arc'hant ne dleont netra d'an tad ha d'ar vamm. Al leve hag ar rezervasion a zo evel diazezet war ar plas ha da veza paeet gant ar per-c'henn nevez hepken.

Heman a dle peurliesia, e-keit ma chom gantan e dad hag e vamm, o loja, o maga, o gwiska, entent outo pe yac'h pe glanv e vezont, hag, e berr gomzou, ober stad anezo evel eus tud all an ti. Eun tammig arc'hant a vez dao rei d'ezo ivez, bep sizun pe bep miz, evit ober o dispignou er vourc'h da sul ha kaout peadra da brena butun. Netra muioc'h !

Hag eus an eil dervez d'egile, setu a-greiz holl ar mestr hag ar vestrez lakaet da vevel ha da vatez, evit eur c'houmanant dister-tre. E-keit ma vezint gouest da labourat n'o devo ket re da c'houzanv marteze a-berz ar berc'henned nevez, rak keroc'h e koustfe d'ar re-man servicherien estren, ha nebeutoc'h e vefent douget evito.

Met, pa vez deuet ar gozni, e vez an hopaliez war ar « re goz », ha rebechou ha komzou displijus a gavont a bep tu.

Bez' e c'hellint neuze evit gwir, pa vezint aet kabac'h hag ampustuilh, pe a-raok ma plij ganto, mont d'o zi o-unan, rak divizet eo bet war ar c'hontrad-dilez e tleer lezel ganto pe an ti a-gostez, pe eur penn eus ar c'hranj, goude ma vo bet graet enni eun tamm speurenn da gloza warnan.

Neuze ivez e vo ret paea d'ezo bep bloaz, da c'houel Mikêl, al leve douget war ar skrid ha rei d'ezo meur a dra all evel : eul litrad lêz hemdez ; eul lur amann pe

ziou bep sizun ; mil lur winiz, pemp kant lur ed-du, kant duilh blenchou, diou gordenn geuneud, kant lur gig sall, hag eur varikennad sistr bep bloaz ; plouz ha pell-kerc'h da lakaat en o gwele ; avalou-douar, kaol-irvin ha legumachou-all kement ha m'o do ezomm, ha n'ouzon ket pe dra all c'hoaz ouspenn. Bez' e c'hello c'hoaz ar « re goz » kaout ar wetur pe ar charaban, hag unan eus ar c'hezeg, eur wech pe ziou ar miz, evit ober o zroiadou ha mont d'ar foar pe d'ar pardon.

### BUGALE DIGALON.



Ma n'eo ket diaes merka divizou seurt d'ar re-se war ar paper, e vez eur c'hoari-all a-wechou pa ranker lakaat nep a dle o heulia, d'o seveni.

Hag e klever an tad hag ar vamm oc'h en em glemm : ne vez ket paeet d'ezo o leve d'ar mare, ne roer d'ezo ar pez o deus da gaout nemet diouz tailh hag en eur voulbenna, ne vez ket ar pouez en amann, louz e vez ar gwiniz hag an ed-du, ar sistr badezet pe trenk-put, ar pemoc'h re dreut evit beza lazet, ha klanv ar c'hezeg pe torret ar wetur, p'o devez c'hoant da vont en hent.

Lod a grede eo dre faot an tad hag ar vamm ma c'hoarvez kement-se, abalamour ma n'ouzon ket lakaat o mab pe o merc'h da suja d'ezo. D'ar re-se e livirin na blij ket d'ar gerent mont da brosezi ouz o bugale. Kas an urcher da unan anezo a vefe eur vez hag eun disme-gans evit ar familh. Ha setu perak e kavo gwelloc'h an darn vrasa eus ar gerent chom da ziouerout meur a dra, pe da veva en dienez zoken, kentoc'h eget gervel an hini kablus dirak ar barner.

### MANTRUS...



Sonj am eus eur vourledenn goz a veze graet bep seurt viloniou d'ez i gant he merc'h-kaer. Eur wechad, pa ne c'helle ket, abaoe pell a oa, kaout ar pez a oa dleet d'ez i, e k'as he mab dirak al lez-varn. Kondaonet e voe da rei ar pez a dlee d'e vamm, hag ar barner a lavaras da houman he devoa ar gwir da lakaat terri an dilez ma karje, o veza na heulie ket ar mab an divizou a oa ennan. « Na rit ket eur seurt tra, m'ho ped, emezi. Eur vez a vefe klevout ano eus va faotr hag e wreg. Gwelloc'h e kavan chom hep kaout netra diganto eget lakaat terri eur c'hontrad a zo bet sinet ganin ».

Eur wech-all, e unan eus gwella parrezioù ar Porze, e oa eun tad o vont da ober e zilez. Setu hen, gant e vugale, da di an noter. N'edo ket heman er gêr, hogen ar c'homis a gemeras ar c'hrad evit ober an afer. « Eur pakad butun a rankan da gaout bep sizun da heul va rezervasion-all », eme an tad. D'ar mare-se, ne gouste ar pakad butun nemet dek gwenneg. Hag ar c'homis, brell ha dievez eun tammig emichans, a skrivas e tifere an donezoner kaout, « dek gwenneg bep sizun da brena butun ».

Klozet e voe ar c'hontrad evel-se, met, a-benn eur pennad-amzer goude, e kreskas priz ar butun, hag e voe kaset ar pakad da c'houec'h pe da eiz real. Ar paourkêz koz a rankas tremen gant e zek gwenneg bep sul, rak « ar pezh a oa skrivet a oa skrivet », a lavaras d'ezan e verc'h kaer, daoust d'ezan da gaout sonj mat eus ar pezh a oa bet divizet.

Hag henvel a-walc'h e c'hoarvez ivez, e kement lec'h ma vez bet graet dilezou, pa vez dao paea o leve d'ar re goz. Daoust d'ar geraouez da veza deuet war an holl draou, ne roer d'ezo, pa ne glasker ket mirout netra outo, nemet an arc'hant o devez diviz da gaout.

Abaoe ar brezel-all, eman chench-dichench, ha war ziskar bepred, talvoudegez an arc'hant-paper. Ar re n'o deus breman nemet eun nebeut mil lurioù bep bloaz da zispign eo diaes-bras d'ezo beva, pa ne c'hellont mui gounit netra o-unan.

Aet eo kement tra dreist penn, ar pezh a blij da galz tud ; ne sonjer nemet ennor an unan, bernia ha rastellat paper, hag e rank ar paour-kêz tad hag ar paour-kêz mamm tremen gant leve an dilez, pa vefe ret d'ezo kaout peder pe bemp gwech muioc'h evit gellout beva ha n'eo ket frikota.

Lezennoù a zo bet graet evit kreski priz ar fermou ; mat e vefe ivez rei gourc'hemennou da greski leve an dilezou peogwir n'o deus ket ar vugale skiant na kalon a-walc'h da rei, anezo o-unan, eun digoll dereat d'ar re o deus bet lezet ganto o danvez.

Evit kalz Glaziked n'eo eun dilez nemet eur marc'had ha netra ken. Pa vez ano da zaou zen yaouank da zimezi, e klask ar re a dle beza tud kaer d'an hini a gemero ar plas lakaat e dad hag e vamm da rei o douar hag o stal ar marc'hadnata 'r gwella, ha da zisteurel war al leve ha war ar rezervasion e vezont e sonj kaout. Eur gwir chipotadeg a vez ganto neuze, hag alies, siouaz, ne vez ket diaes o spered gant ar gaou a reont, pe a glaskont ober ouz ar vugale all.

KENEC'HKE.

## Chapeliou Breiz en enor d'ar Werc'hez



### 20. – ITRON VARIA GARMEZ (PONT-'N-ABAD)

Pont-'n-Abad a zo eur gêrig vihan goant, 6.563 a dud enni. Ar pezh a zo da welout enni eo eur c'hastell bras, eur gouent, eun iliz ha tiez koz.

Pell araok m'oa eur c'hastell ha baroned e kêr, ar pont a dreuze al lenn-vor a oa e dalc'h abati Loktudi ; ac'hano eo e teu an ano : « Pons-Abbatis », Pont-an-Abad, roet d'ar gêrig a savas tro-war-dro.

Araok an Dispac'h bras, al lodenn eus kêr a zo war du kleiz ar ster a oa stag ouz parrez Loktudi. Al lodenn a oa war an tu dehou, anvet Lambourg, a oa stag ouz parrez Kombrid ; setu perak kêr a-bez a vez graet anezi breman **Pont-'n-Abad-Lambourg**.

Kouent Karmez Pont-'n-Abad a voe savet er bloavezh 1383 gant Herve, Aotrou ar Pont ; an iliz a voe savet d'he zro etre 1392 ha 1411. Eur c'hloastr kaer a oa ivez er gouent, eus ar XV<sup>e</sup> kantved, 40 vloaz a zo pe war-dro eo bet savet endro e kloerdi koz Kemper.

Kaera tra a zo en iliz eo an dalbenn a sko war al leur-gêr hag ar rozenn vaen a zo en talbenn uhela a-us d'an aoter vras.

Aman e kavomp ivez unan eus kaera skeudennou ar Werc'hez : Itron Varia Garmez, eul labour eus an dibab, ar XV<sup>e</sup> kantved, kempennet a-zoare.

Epad meur a kantved e voe an iliz-se stag ouz parrez Loktudi, eul lec'h a zevosion vras evit kristenien an diou barrez, Loktudi ha Kombrid. Ar venec'h, gouestlet dre o urz da enori ar Werc'hez, a lakaas da vleunia, e kêr ha tro-war-dro, an devosion da Vari. Savet o devoa kenvreurezioù ar skapular evit ar wazed hag evit ar merc'hed ; da vare an Dispac'h e oa c'hoaz beo-buhezek ar genvreurezioù-se.

#### AR VOSENN E PONT-'N-ABAD SANTEZ ANNA WENED.

Er bloavezh 1634 e kouezas ar vosenn war gêr Pont-'n-Abad. An Tad Hugues de Sanit François, bet priol e Santez Anna Wened ha d'ar mare priol e Pont-'n-Abad, a reas le, ma teufe ar c'hlenved da ehana, da vont gant e venec'h da

bardona da Santez Anna Wened. Pa glevjont kemend-all e reas kêriz dioustu an hevelep le hag e voe deizet ar brosesion da unan eus ar sulveziou warlerc'h Pask.

Abred diouz ar mintin e voe kanet an oferenn e iliz an Tadou Karmez, an holl bardonerien, 200 pe 300 anezo, a gomunias. Unan eus an tadou, en eur sarmon leun a feiz, a zegasas da sonj eus al le a oa bet graet hag eus ar santi-manchou a dleed kaout e-pad ar pelerinaj, ha yao en hent.

Er penn araok, kroaz ar gouent ; goude-se ar venec'h, ugent anezo ; goude-se daou berson eus ar vro o tougen pep-hini eur banniel da Santez Anna ; ar wazed, tri ha tri, renet gant senesal Kêr, 70 vloaz den pe ouspenn, lakaet gantan en e benn ober ar veaj, hen ivez, war e droad ; er penn diweza, ar merc'hed.

Chom a reas ar brosesion a-sav da genta e chapel Sant Rok e Ploveilh ; da-c'houde e Kemper e-lec'h ma voe graet d'ez i ar gwella degemer. Pedennou a voe graet en Iliz-Veur gant an Aotrou 'n Eskob ouz o ren, an Ao. Le Prêtre de Lezonnet.

Antronoz vintin ar brosesion, kresket gant eun niver bras a dud fidel eus a Gemper, a yeas adarre gant he hent. Pep-hini a chomas brao en e blas, menec'h, gwased, merc'hed, pep-hini gant e rummad. War droad e kerze an holl, nemet ar re glanv pe vac'hagnet. N'oa kont etre ar bardonerien nemet eus traou santel ; menec'h a zeue hag a yae eus eur penn d'egile d'ar brosesion o teurel evez ouz an urz vat hag ouz ar pedennou. Kantikou ha salmou a veze kanet ivez tro ha tro, berroc'h a-se e veze kavet an hent. Pa gaved eur chapel war hent e chomed a-sav, er c'hêriou kemend-all, prezegennou a veze graet neuze evit maga feiz ar bardonerien.

E Pont-Aven e voe tremenet an eil nozvez hag e Henbont an drede. Er gêr ziweza-man e voe an dud hegarat kenan ha brokus evit ar bardonerien, dreist-holl ar venec'h eus urz Karmez ha menec'h abati ar Joa.

En dervez warlerc'h, setu ma weljod er pellder tour iliz Santez Anna. Diaes e vefe displega levnezh vras ar bardonerien ; an holl en em daolas d'an daoulin evit saludi an iliz santel. Hep dale setu war bord ar c'hoad menec'h Karmez Santez Anna o tont en arbenn d'o breudeur hag holl asambles, kalz tud all diwar-dro ouz o heul, ez eas ar bardonerien en iliz benniget, ti Santez Anna. Nijet oa kuit pep skuizder, daelou a levnezh hag a frealzidigez a oa en daoulagad, ha ne voe ket kavet hir awalc'h an devez warlerc'h penn-da-benn evit pedi ha kana kantikou.

Pa zistroas ar birc'hirined d'ar gêr ec'h ehanas ar vosenn ha ne bakas mui den ar c'hlenved. Evit derc'hel sonj eus ar burzud-se e voe lakaet eun daolenn eus Santez Anna en unan eus chapelioù iliz Karmez, dediet araok da Santez Barba.

## An Diaoul n'eo ket bet pedet d'ar friko !



Unan hag a dlee skrabat e benn, d'an 13 a viz ebrel 1944, eo Satanaz.

Paket en deus, en dervez-se, eun distokadenn.

En eur barrez a vro Leon ez eus bet d'an dervez-se eun eured vras, ha Satanaz a oa bet pedet da chom er gêr ! Ha n'eo ket hepken evit an eured, evit ar friko ivez, ar pezh a zo gwasoc'h, rak, ma ne blij ket d'ezan mont d'an iliz, eo eun dudi evitan mont d'ar friko dre ma kav eno hepred an tu da grapa tamm pe damm.

A-wechou e vez pedet gant ar gerent o-unan, aliesoc'h avat e vez galvet gant an dud yaouank, ha bec'h d'ez i a galon vat ! Neuze e weler o tremen dre henchou santel Breiz-Izel, renkennadou tud yaouank, kazel-ha-kazel gant Satanaz.

Feiz ! Eur paotr faro a vez anezan d'an derveziou bras-se !

Sellit mat outan neuze o tremen, eur c'hoarz hudur war e zremm, tan an ifern o skedi en e zaoulagad, ha kanaouennou louz en e c'henou, eus ar seurt a zibaber war ar bern teil.

Ha nag en deus anezo renket en e benn : peadra da zibuna adalek penn kenta al lein betek an hanter noz ma vezo, pa yelo d'ar gêr, en derveziou ma vo echu abred e abadenn gantan.

Mat, d'an 13 a viz ebrel, ez eus bet eur friko, ma oa pedet Satanaz gant ar gerent hag an dud yaouank da chom e lec'h ma oa.

N'ouzon ket ha klasket en deus, er memes tra, kaout e lodennig : divergont a-walc'h eo evit en em bedi e-unan a-wechou ; met ar pezh a ouzon ervat eo, n'eus gwelet doare ebet d'ezan en dro-man.

Re a aon en doa moarvat da rankout mont kuit buanoc'h eget na vefe deuet, gant eur... sac'had dismegans war ar marc'had, rak paotred ha merc'hed yaouank ar friko-man a ouie ervat petra 'raent, ha n'o doa ket a riu d'o daoulagad : feal, dispont, glan, seder, ha gwir gristenien, evel m'o doa gouestlet beza, kals anezo, oc'h en em staga ouz an Ykam.

\*  
\*\*

Kaer ha laouen e voe an eured, kaera hini o doa gwelet biskoaz tud ar bourg, diredet niverus da sellout ouz ar marvailhou.

Falla teodou a vez er poull-kanna n'o doa kavet netra da rebech abenn al lun war-lerc'h ! Prezeger, ograouer, kanerien ha kanerezed, an dud-nevez hag... ar re goz, ar rummadou tud yaouank renket sioul en iliz, holl o doa en em glevet evit kas eus o gwella pedennou c'houek war-du ar Mestr a oa o venniga ar familh nevez savet.

N'em eus ket ezomm da lavarout d'eoc'h e voe graet pep tra e brezoneg. En eur barrez a Vreiz, eured daou Vreton yaouank ne c'hell beza kaer nemet gant sikour yez ar vro.

Hag ar re ne fell ket d'ezo kredi eo dudius eun eured gant kantikou brezonek, n'o doa nemet dont da welout ha da selaou ; ha m'o deus keuz, emaint c'hoaz abred a-walc'h evit mont da c'houlenn gant ar re o deus gwelet : testou a-walc'h a gavint.

Hag ar pezh a zo kaeroc'h c'hoaz, e-pad an oferenn e

voe gwelet o tostaat ouz an daol-santel, d'en em unani gant ar Mestr, an daou bried nevez ha kals mignoned c'hoaz d'o heul.

\*  
\*\*

Ma voe roet ken kalonek an hanterenn genta eus an devez da Zoue, an eil hanterenn ne voe ket roet da Satanaz, m'hel lavar d'eoc'h. Diaes e vefe bet, gwir eo : Satanaz n'edo ket eno.

Koulskoude, n'eo ket kanaouenn ha c'hoarzedeg a reas diouer e-doug al lein.

Pere'henn ar sal-friko a selle bep an amzer gant enkreuz ouz an doenn : daoust ha dere'hel a ray, a sonje, gant kemend-all a cholori ! Daoust d'ezan da veza toer e-unan, ne oa ket re zizoursi.

Kouls ha me, paotr koz, an holl dud yaouank a oar e oa deuet ar c'hiz, eur pennadig 'zo, dre ar vro abez moarvat, da gana eur rimadellerez leun a spered-sadorn-d'an noz, da gement hini en deveze distaget eur ganaouenn pe eun displegaden bennak, evit e drugarekaat eus ar boan en doa kemeret.

« Et embrassez celle, celle... »

N'eo ket diou wech na teir eo e veze klevet met dek ha pemzek gwech, ken alies gwech ma kane unan bennak ; ma 'z oa sec'h mat an eienenn e spered holl dud yaouank ar vro.

En dro-man ez eus chenchet baz d'an daboulin, ha ton d'ar son. Ar rondonenn goz a zo bet pedet ive da chom er gêr, moarvat da zerc'hel kompagnunez da Satanaz, evit e sikour da skrabat e benn, rak war a lavarar, amezeien dost int.

Er friko-man, kerkent ha ma oa azezet ar c'haner pe ar ganerez, e veze eur paotr pe eur plach yaouank all en e zav, evit kana ar meuleudiou dre eur ganaouenn hag eur stlakadenn-daouarn dishenvel bep tro.

Ha, feiz, ne voe den d'en em glemm, pell ac'hano.

Ken plijus eo bet an doare nevez zoken, m'o deus divizet kals tud yaouank eus ar c'hanton a oa eno, nevezi an abadenn e kement friko m'o devezo tro da vont.

Selaouit 'ta, paotred ha merc'hed yaouank.

Deskit da Satanaz evit mat, ar vicher da skrabat e benn da bep devez friko : muioc'h a levenez wirion a vezo en hor Breiz, hag e-keit-se, hor bezo peoc'h gant an Diaoul. Ha kenta tro ma vezo eured ha friko eus ar seurt-se, arabat d'eoc'h, en han' Doue, ankounac'haat pedi ac'hanoun-me da vont, rak me, n'eo ket Satanaz eo ez oun.

FALC'H-AR-PRAD.

# AR VAMM-BAPPA

(WAR DON : P'edon war bont an Naoned)

1  
DISUL edon en « auto », digedon lanlira,  
Disul edon en « auto », digedon lanla,  
Tre Brest ha Landeda, digedon lanlira,  
Tre Brest ha Landeda, digedon lanla.

2  
Ha me gwelet dirazon  
Eur goant a « vamm-bappa ».

3  
Ha ganti war e barlenn  
Eur bugelig daou va.

4  
Re bar oa d'eur verc'hodenn,  
He ano oa Seza.

5  
N'oamp ket c'hoaz e bourg Gouesnou,  
M'oa skuilz o varlenna.

6  
— « Piti Loulou, enezi  
Va se mettre à dada ».

7  
Hag hi lakaat ar paotrig  
War ar skaon da glucha.

8  
Ha raktal an itronig  
A grog d'en em ficha.

9  
Nag a draou en he sac'hig  
Evit en em ginkla.



10  
Eur meleziour, eur pod bleud  
Eur grib, eur vaz liva.

11  
Eur rikou hag eur rakou  
Ha me oar me petra.

12  
Edo mall o dua.  
Malvennou ha mourennou

13  
Ivinou ha muzellou  
Edo ret o ruzia.

14  
Hag an diouched diskempenn  
Edo poent o bleuda.

15  
Eur pennad bleo rodellek  
A chome da doka.

16  
Met setu eun draskadenn,  
Ar c'harr chomet a-sav.

17  
Ar paotr a gouez em barlenn  
Hag a grog da ouela.

18  
Du-man du-hont eo strinket  
Rikou rakou bappa

19  
Epad ma krog 'n he bugel  
Me kregi d'o zapa.

20  
Ha me goulenn diganti :  
— « N'eus ket kollet netra ? »

21  
Trugare d'eoc'h, emezi,  
Desket 'c'h eus d'in beva.



## War an henchou gant Itron Varia Voulogn.



Setu bloaz hag ouspenn, abaoe m'eo tremenet en hon touez skeudenn vrudet Itron Varia Voulogn. Piou n'en deus ket sonj eus an enor dispar a zo bet graet d'ezhi ? Piou n'en deus ket sonj eus an nozvezioù tremenet o kempenn ar bokedou, ar garlantezennou, ar bolzioù-enor a dlee ficha an henchou, an tiez, an ilizou, ken brao ma n'eus bet gwelet biskoaz kemend-all en hor bro.

Piou n'en deus ket sonj eus ar mare ma welas, evit ar wech kenta, skeudenn an Itron Varia o tostaat, evel douget war gwagennoù eur mor a dud, trouz ar mor graet gant pedennoù ha kantikou...

eus ar vugale a bede, o divrec'h e kroaz, evit goulenn digant Rouanez ar Peoc'h lakaat fin d'ar brezel, hag o zad da zistrei d'ar gêr ;

eus taolenn gaër ar vugaligoù azezet war barlenn ar Werc'hez ;

eus ar re glanv lakaet da boket d'ezhi, epad ma krie an holl o fizians e Mari : « Itron Varia Voulogn, roit ar pare d'an dud klanv » ;

eus ar baotred hag ar merc'hed yaouank ken niverus a gerze gant o zreid noaz war ar vein lemm, evit rapari an nozvezioù a zizurz tremenet er salioudans ;

eus ar mammou hag ar priedoù a c'houlenne, an daelou en o daoulagad hag ar fizians en o c'halon, diwall o bugale hag o gwazed e riskl bras pell diouz ar gêr ;

Piou n'en deus ket sonj eus an nozvez tremenet e-kichen an Itron Varia, er sav pe daoulinet war an douar noaz, ar c'horf marteze o krena gant ar riou, met ar galon tomm gant ar garantez ;

eus an oferenn hanter-noz hag ar Gonsekrasion da Galon dinamm ar Werc'hez a-raok mont da gomnia...

Piou n'en deus ket sonj dreist-holl eus an eur ma rankas kimiadi diouz ar skeudenn vuzudus ?

Pet ha pet n'o deus ket klasket neuze pokat eur wech c'hoaz da vantell ar Vamm, ha diskouez dre ar pok-se ar garantez a oa leun ar galon ganti.

Pet ha pet o deus d'an eur-se skuilhet daelou puilh ? Pet n'o deus ket bet avi ouz an dud a c'helle mont da heul ar Werc'hez epad tri, pemp, nao dervez evit goulenn diganti distro eur pec'her ouz Doue.

\*

\*\*

Tremenet eo, ha dre ma tremene e skuilhe grasou war ar vro.

Pet o deus kavet yec'hed ar c'horf ? n'ouzomp ket.

Pet o deus kavet yec'hed an ene ? n'ouzomp ket kennebeut. Dre viliadoù e rankfer o niveri.

« *Ar brasa burzudou graet e Lourd, a lavare ar c'hardinal Gerlier, er gador-gofes eo e vezont graet* ».

Kaera tra a zo e Troveni vras ar Werc'hez, n'eo ket ar pedennoù lavaret hep mez ebet, n'eo ket niver an dud a zeu d'he ambroug dindan an holl amzerioù, an avel, ar glao, an erc'h pe an heol tomm, ar brasa

hag ar c'haera burzud ar beleg hepken hen anavez er gador-gofes pa lak ar peoc'h er c'halonou, ar pare er c'houstiansou hag ar vuhez en eneou.

Tremenet eo...

Pelec'h eman breman ?

Unan eus ar beder skeudenn a zo d'ar mare-man e Pariz e lec'h ma tle chom eur c'houec'h miz bennak. Degemeret eo bet da viz Here gant ar c'hardinal Suhard, eur 100.000 a dud endro d'ezan.

An hini hon eus gwelet, en hor Breiz goude beza bet e eskopti Sant-Brieg ha Roazon, er Mayenne, er Manche, a ra breman he zro dre ar C'halvados. Pell eman c'hoaz eta diouz Boulogn. Ne erruo en he c'hêr dismantret hag en he Iliz devet ha freuzet nemet da fin ar bloaz a zeu.

Tremenet eo...

He skeudenn avat a zo livet en hor spered, he c'harantez skrivet en hor c'halon... !

Tremenet eo... met kaset he deus ganti an tamm paper hon eus taolet en he bag, testeni eus ar gonskrasion hon eus graet d'ezi.

Ar paperiou-se a zo breman en eun Iliz e Pariz dirak daoulagad ar Werc'hez ; eur c'houec'h milion bennak a zo anezo.

Tremenet eo... met ma tistrofe en hon touez da c'houlenn diganeomp penaos hon eus dalc'het d'ar promesaou graet d'ezi : kaout karantez evit Doue hag an nesa, beza fidel d'ar bedenn ha d'an oferenn, d'ar chapeled ha d'ar sakramanchou, ...petra a c'hellfemp respont d'ezi ?

Itron Varia Voulogn, Rouanez ar vro hag hor Mamm, goulennet hor boa diganeoc'h distro ar brizonerien : emaint en hon touez.

Goulennet hor boa ar peoc'h : deut eo ar viktor.

Rouanez galloudus, kendalc'hit ho labour. Warlerc'h peoc'h an armou, roit d'eomp « peoc'h gwirion an eneou ». Diskouezit d'eomp ho kalon a Vamm ! Gounezit kalon ho pugale, ma teuint da chench buhez. Steredenn vor, bezit silvidigez eur bed diahelet. Diwar ho pagig wenn, astennit d'eomp ho torn madezeus evit hor sikour da ober eus hor bro eur vro gaer, laouen, nevez ha kristen.

EUR MISIONER.

*Arc'hant d'ar skoliou kristen ?*

*Perak ?*



Jakez al « Liberté » a zo en em gavet ganen, eun tachadig a zo. Lezanvet eo bet gant an dud Jakez al « liberté », o veza ma vez ano gantan dalc'hmat eus ar frankiz, ar justiz, al « liberté ».

Tenval e oa e benn... Ha me toulla kaoz...

— Ac'hanta, Jakez, penaos eman ar bed ganez ?

— Penaos ? Hag e c'houlennit diganen penaos, rivinerien ar vro ma 'z oc'h ?

— Rivinerien ar vro ?

— Ya ! Evel pa ne vije ket a-walc'h d'ezi paea he skoliou, e rankfe c'hoaz paea re ar Gatoliked, ma vije graet diouzoc'h.

— Ha perak ne vije ket graet diouzimp ?

— Perak ? Daoust ha n'emaomp ket e bro ar Frankiz, e bro al Librentez ? Daoust ha difennet ez eus bet ouzoc'h biskoaz sevel skoliou kristen ? Daoust ha difennet ez eus bet ouzoc'h biskoaz lakaat ar gerent da baea d'eoc'h ho mistri-skol ?

— Nann, a-dra-sur. Met ar gerent paour-se a ranko neuze kenderc'hel, dre an tailhou, da baea skoliou ar gouarnamant, ha ne blijont ket d'ezo, ha da baea war ar marc'had ar skol a blij d'ezo ? Rankout paea diou skol pa n'implijer nemet unan, daoust hag an dra-se a zo just ? Daoust hag an dra-se eo ar Frankiz, al Librentez a brezigit kemend-all ? Daoust ha ne rankfe ket beza ken aes ha ken aes implij an eil skol hag eben.

— An neb a fell d'ezan kaout ar Frankiz a rank he faea !

— Neuze 'ta, Jakez, ar gerent a zo paour n'o deus frankiz ebet da skolia o bugale evel ma plij d'ezo ?

— Eo 'ta. Evit netra eman ar skol.

— Ya, skol ar gouarnamant ; met ma ne blij ket ar skol-se d'ezo, petra 'raint ? Daoust hag al liberte n'eo ket ar galloud da ober ar pezh a blij d'eomp ?

— Marteze a-walc'h.

— Mat, ne vije ket lavaret. Rak eur frankiz hag a ranker paea, n'eo ket eur frankiz eo, met eur goaperez e-kenver ar re baour. Ar frankiz ne vez ket prenet, roet e vez. Frankiz prenet, frankiz nac'het ! Ha setu perak e c'houlennomp ma vije lakaet hor skoliou war an hevelep renk ha re ar gouarnamant, evit ma vo aes da bep hini ober e zibab, hep na vefe ret d'ezan gwelout ha kofek a-walc'h eo e yalc'h. N'eo ket gwir ?

— O, c'houi a oar trei brao ho kaoziou.

Ha Jakez al Liberte a zo aet kuit, e benn'tenvaloc'h eget biskoaz...

Klanv e vije kouezet, panevet eur pakad butun fresk, kaset d'ezan eus va ferz.

AREAD.

## Pok ar bugel d'ar Mabig-Jezuz



*Bez edon eun dervez en eun iliz a oa enni ar Mabig-Jezuz er c'hraou, rak amzer Nedeleg a oa. Daoulinet a-dreñv eur piler e welen an dud a zeue dirak ar c'hraou d'ober o devosion.*

Ha setu ma teuas en iliz eur vaouez yaouank, gwisket e kanv, gant eur bugelig war-dro c'houec'h bloaz. Ar bugel a redas dioustu, buan, buan, d'ar c'hraou hag ar vamm, goude beza graet eur bedenn dirak an tabernakl a yeas ivez dirazan.

— « Mamm, eme ar paotrig en eur chacha war he zavancher, gwelit 'ta ar Mabig-Jezuz o astenn e zaour-nigou hag o vouse'hoarzin, hag ar Werc'hez, ha sant Jozef ! Gwelit an tri roue hag ar bastored ! Sellit 'ta mamm ouz ar steredenn, brasoc'h eo eget ar re a zo staget ouz bolz an Nenv... »

Hag ar bugel a save war beg e dreidigou hag a selle, hag a selle, digor frank e zaoulagad gantan.

— « Mamm, emezan c'hoaz, sellit an azen hag an ejen. Na pebez azen kaer ! Louet eo ! Hag an ejen rous !

Henvel mik ouz hor buoc'h rous a zo er gêr.

» Mamm, ha ma kasfen eur pok d'ar Mabig-Jezuz ? »

Hag ar paotr, evel eun aelig eus ar baradoz hag ober ar pezh a lavare.

« Eur pok ivez, emezan, d'ar Werc'hez, unan ivez da sant Jozef ».

Ar vamm, hep lavarout ger, a bokas d'he zro d'he bugel ha me gav d'in e ouele.

— « Breman va mabig, emezi, p'ac'h eus sellet ouz pep tra, lavar d'ar Mabig-Jezuz ar bedenn a rez bemdez diouz an noz. »

Ar paotr a chomas nec'het eur pennadig : « Tud'zo mamm. » — « N'eus ket, va mabig, n'eus den aman nemet an Aotrou Doue ha ni hon daou. Lavar goustadig ma kerez. »

— « Va Doue, eme ar bugel, me ho kar, va diwallit epad va c'houk. Diwallit va mamm, mamm goz ha tad koz, va c'hoar Annik a zo e pansion. Ho pet truez dreist-holl ouz va zad beuzet e Mers-el-Kébir. Digorit d'ezan dor ho paradoz. Jezuz, Mari ha Jozef, me ro d'eoc'h va c'halon. »

Ar vamm hag ar bugel a yeas neuze er-maez ha me a sonje :

— « Joa a dle kaout an aotrou Doue ouz e vignon bihan ken didro, ken glan a galon hag en deus roet d'ezan eur merk ken kaer a garantez. N'en deus ket manket da venniga anezan hag ivez ar familh a-bez. »

Mammou Kristen, deskit d'ho pugaligou anaout ha karout ar Mabig-Jezuz. Evit-se kasit anezo alies dirak ar c'hraou santel... Hag ivez perak na ziskouesfec'h ket d'ezo ober o-unan da vare gouel Nedelek eur c'hraouig er gêr ? Tammou koad, tammou paper, ilio ha man (kinvi), skeudenn ar Mabig-Jezuz, ar Werc'hez ha St Jozef kempennet kaer a rafe mat ar « jeu ». Plijadur o defe o kemer soursi outan, sklerijenna anezan gant eun tamm koz « bouji » bennak Laouen e vefent o lavarout o fedennou hag o kana kanaouennou dirazan...

Ha neuze ivez ar Mabig-Jezuz, laouen, a rofe e gaera bennoz d'e vignoned vihan hag ivez d'o familh a-bez.

KER-ELE.

## ■ ■ ■ ■ ■ C'HOARZOMP EUN TAMMIG... ■ ■ ■ ■ ■

### ✕ ETRE MAMMOU-KAER !

— M'hen asur d'eoc'h, itron vat, ho mab-kaer en deus spered, spered da werza !

— Mat, neuze eo gwall biz warnan, rak n'e welan ket alies oc'h aber implij anezan.

### ✕ AR VUGALE DA DOULL AN NOR !

Perc'henn an ti ne fell ket d'ezan feurmi d'ar re o deus bugale. Eur vaouez a zeu da c'houlenñ feurmi eur gambr :

— Bugale hoc'h eus ?

— Tri, aotrou, er vered emaint o zri.

— Paour-kaez maouez !... Deuit 'ta da welout ar gambr.

Plijout a ra deoc'h ? Mat 6000 lur eo. Greomp dioustu ar paper mar karit.

Hag e voe sinet al lizer...

— Breman ez an da gerc'hat va bugale.

— Penaos 'ta, ho pugale ? Me gave d'in edont er vered ?

— Re wir eo, aotrou. Er vered emaint. Lavaret em boa d'ezo chom eno d'am gortoz. Ouspenn tud varo a vez en eur vered, dre c'hras Doue.

### ✕ E TI AR MEDISIN.

— Aotrou medisin, ha sonjal a ra d'eoc'h e c'hellin parea ?

— Re sur oun... Rak unan dre gant hepken a weler o parea eus ar c'hlenved ho peus.

— N'eo ket posubl ? Met neuze...

— Bezit dineec'h. Unan dre gant a weler o parea, a lavaran d'eoc'h... C'houi eo ar c'hantvet a ran war e dro. An 99 all a zo maro... Ho tro a zo da barea !

### ✕ ETRE MAMM HA MERC'H.

Ar verc'h. — Re c'holoet eo an amzer.


Ar vamm. — Marteze, va merc'h, he deus an amzer c'hoant rei d'it eun tammig kentel, ken dizolo ma vezez re alies.

### ✕ KI HA PEMOC'H.

Per. — Sell, Yann, me am eus eur c'hi hag en deus spered betek e beg e lost. Kerkent ha ma wel ac'hanon e red da gerc'hat d'in va yalc'h-vutun.

Yann. — Mat, Per, va femoc'h d'in me en deus muioc'h c'hoaz a spered eget da gi. Kerkent ha ma 'z an d'ar c'hao da gerc'hat eur voutailhad sistr, e ra eun distoufer (tire-bouchon) gant e lost.

## Breudeur, ni glev ho klemmou...



Ar vreudeur-se, piou int ?

Da genta, an dud divadez a c'houlenn diganeomp sikour anezo da anaout ar gwir Doue, evit gellout mont int ivez eun dervez d'ar baradoz.

Ar vreudeur-se 'piou int c'hoaz ? Hor Misionerien a zeu, goude ar pemp bloaz brezel, nann d'en em glemm. met da zegas sonj d'eomp eus o foaniou hag eus o ezommou.

Ni aman, hon eus bet a bep seurt trubuilhou ; kollet ganeomp hor frankiz, gwelet hon eus ar vro a-bez dindan treid an Alamaned. Heskinet ha laeret omp bet ganto... Tennet o deus diganeomp betek an tamm eus hor genou ha ma vefe bet padet ar brezel e vefemp bet lakaet ganto noaz war an douar noaz...

E kement lec'h m'eo bet ar brezel, en Afrik, en Indochin, er Chin, er Japan, en Oseani, ar visionerien o deus anavezet an henvelep gwalinier.

Kaset int bet alies kuit eus o zi, tennet eo bet diganto o feadra, hep doujans ebet evit ar re baour hag ar re glanv a raent war o zro.

Naon o deus bet ivez. C'houec'h vloaz a zo n'hon eus gelllet kas skoazell ebet d'ar visionerien.

Dirollet eo bet an naonegez war ar misionou.

Er bloavez 1943 nemetken, e weler e bro Indez eur milion a dud o vervel gant an naon.

Er penn kenta eus ar bloaz-man, e klevomp eun Eskob o lavarout en deus bet ranket gwerza betek ar pemp kloc'h eus e Iliz-veur evit gellout rei eun tamm bara d'e visionerien.

Eun Eskob all a skriv da Rom en deus ranket serri dor e gloerdi bihan dre ma n'hell ket maga ar skolidi.

Evel war zouarou hor bro, war zouarou ar misionou en deus ar brezel graet ivèz e reuz : Eskoptiou, ilizou, ospitaliou, skoliou, kouenchou aet da netra dre an tan pe dre ar bombezadennou.

A-walc'h eo envel *Nagasaki*, kollet ganti nao mil katolik war an dek mil bennak a oa er gêr-se, dre labour ar vombezenn anvet « bombe atomique ». Ar Japaniz d'o zro, o deus lazet an Tad Seznee hag an tad Baron o daou eus Eskopti Kemper.

Daoust d'ar reuz-se ha d'an holl drubuilhou deuet d'e heul, n'o deus ket hor misionerien kollet kalon, hervez ma skriv an Aotrou Costantini, Rener Breuriez ar Feiz



e Rom en ano an Tad santel ar Pab. « N'eo ket war ziskar eo aet ar misionou, war gresk ne lavaran ket, peogwir abaoe ar brezel ez eus bet savet teir mision nevez. »

Ar skoliou ivez a ya atao war greski dre an niver ha dre ar vugale o darempred.

D'ar mare-man, e lenner war ar c'hazetennoù anvioù misionerien nevez aet en hent pe evit an Afrik, pe evit an Asi, pe evit an Oseani pe an Amerik-Uhela. Gant pebez dudi e vezint degemeret gant o c'henvreudeur koz ! N'eo ket al labour a vanko d'ezo ! Bras meurbet eo an cost, an eosterien avat n'eus ket kalz anezo !

« N'omp ket a-walc'h a visionerien. Dirazomp ez eus c'hoaz ousspenn mil milion a dud divadez.

Ni hag a zo en Afrik, hon eus pep-hini ac'hanomp 80.000 paian da c'hounit da Zoue.

Ni hag a zo en Indez, er Chin hag en Oseani, hon eus 100.000, ha ni hag a zo er Japan, hon eus betek 200.000. »

Pedomp eta evit ma kresko niver ar visionerien. Pedomp ivez evit ma c'hellint sevel a-nevez hag hep dale, o ilizou, skolioù, ospitalioù, diskaret e-kerz ar brezel. Hag ar re ac'hanomp o deus danvez, roomp a galon vat hor prof evit Breuriez ar Feiz.

Ni aman, a c'hell konta beza sikouret, evit hon dismantrou, gant ar gouarnamant ha gant broioù mignoned d'eomp. Met ar visionerien, piou a roio d'ezo dorn, ma n'eo ket o c'henvroiz ?

Dalc'homp sonj eus komzou an Tad Santel ar Pab Pi XI :

« Dreist d'an holl oberou mat, eman an dever da sikour ar visionerien. »

GWAZTINO.

## DAOU HA DAOU

El levrig man e kaver danvez labour yaouankiz kristen ar maeziou evit ar bloaz 1945-46. Evit kompren gwelloc'h petra eo ar garantez etre paotr ha plac'h ha petra eo ar briedelez, evit deski penaos en em brepari d'ar Garantez ha d'ar Briedelez, lennit « DAOU HA DAOU ».

Skriva da : M. le Chanoine FAVÉ, 14, Place St-Corentin, Quimper.

## AN OFERENN

### HEULIET GANT AN DUD FIDEL

Eul levrig koant savet gant an Ao. GUERMEUR, Person Sant-Neven, skeudennet gant Joël G. PHILIPPON.

Kaout a raer el levrig-man pevar doare da heulia an oferenn, pep hini anezo displeget e kantikou.

E kement parrez a zo e tlefe beza gwelet al levrig-man etre daouarn an dud fidel.

Skriva da : M. l'abbé GUERMEUR, St-Méen (par Lesneven) Fin.

## LAZET OC'H BET



Miliadou ha miliadou a gristenien a zo bet lazet en hor bro, epad ma oamp gwasket gant an Alamaned... Evito em eus skrivet ar c'homzou-man.

Lazet oc'h bet ganto, abalamour ma oac'h didamall... rak eun torfed e oa evito beza didamall.

Lazet oc'h bet ganto abalamour ma oac'h yaouank... rak koz e oant evel ar gevier.

Lazet oc'h bet ganto, abalamour ma oac'h pur... rak ho parentez a oa eur rebech evit ho eneoù brein.

Evel ma tiwader ar chatal, diwadet oc'h bet ganto, dres abalamour ne felle ket d'eoc'h beza eur vandenn loened o plega d'ho youlou-kigerien.

Lazet oc'h bet ganto, abalamour ma oac'h libr, rak, ne oant nemet sklavourien ha kas o doa ouz al librentez.

Lazet oc'h bet ganto, abalamour ma oac'h gwella bugale ar vro, rak keit ha ma chomo ano hor bro war ar bed ne vezo ket heman divalo awalc'h evito.

Lazet oc'h bet ganto, abalamour ma oac'h mignoned d'ar C'hrist, rak c'hoant o doa kroaztaga adarre Salver ar bed.

Karradou gevier o deus dislonket war ho peziou... met n'heller ket mouga mouez ar gwad.

Dallet gant o imor diskiant, e kave d'ezo e oac'h bet lazet mik ganto... evel ma sonje ar Juzevien gwechall beza lazet mik ar C'hrist.

Ha padal, o deus roet deoc'h c'houeka levezet a c'heller rei d'eur c'hristen, an hini a danver o rei d'ar Mestr testeni ar gwad.

Lazet o deus sellou ho taoulagad, met war ho lerc'h e teuo eur bern yaouankizou all hag a welo, sklêroc'h c'hoaz egedoc'h, ar wirionez hoc'h eus gwelet.

Diwadet o deus ho kalon, met miliadou a galonou all, war ho lerc'h, a drido a-unan ganeoc'h gant karantez ar memes Mestr.

Serret o deus d'eoc'h ho kenou, met klevet a reomp mouez ho kwad ha mouez ar vein trempet gant ho kwad.

Sevel a ra ho mouez evit tamall ho pourrevien, rei ar frankiz d'ar sklavourien ha chacha war ho lerc'h kement den a zo dichadenn e galon.

Mignoned, klevet a ran mouez ho kwad... Krenvoc'h eo eget toumpi an dud hag ar bed.

Deski a rit d'eomp eo c'houekoc'h mervel evit ar justiz eget chom beo diwar marc'hajou vil...

kaeroc'h koueza maro-mik war an hent dre garantez, eget mont war-raok leun a vuhez diwar ar fallagriez.

N'eus ket kaeroc'h maro eget hini eun den yaouank a ro e vuhez a galon vat.

Kaeroc'h eo ar bern bleuniou nevez troc'het eget ar bern frouez dare.

\*  
\*\*

Mignoned, selaou a raimp ho mouez. Bale a raimp war ho roudou.

N'en em lezimp ket da veza trec'het gant ar gasoni. Lakaat a raimp anezi da gila dirak hor c'harantez.

En em venji a raimp en eur stourm evit ma vevo an dud er frankiz...

betek ma tigo an daoulagad a zo serret kloz, betek ma vo trempet gant an daelou ar c'halonou disec'het,

betek ma krogo an tan, tan ar garantez, en eneo skornet.

TAD M.

## LEVRIOU BREZONEK

*Buhez Hor Salver Jezuz-Krist*, gant AN AO. UGUEN : 120 l. (dre ar post : 137 l.)

*Ar Werc'hez Vari, Hor Mamm*, gant AN TAD MEDARD : 50 l. (dre ar post : 58 l.)

*Sant Fransez a Asiz*, gant AN AO. INIZAN HAG AN TAD EUJEN : 100 l. (dre ar post : 111 l.)

*Sant Fransez, mignon ar vugale*, gant B. MELAR : 40 l. (dre ar post : 48 l.)

*Fatima*, gant AN TAD MEDARD : 70 l. (dre ar post : 78 l.)

*Dincar c'hoarzin*, gant AN TAD MEDARD : 70 l. (dre ar post : 78 l.)

*Fioretti pe Bleuniou sant Fransez* : 65 l. (dre ar post : 73 l.)

*An oferenn displeget gant taolennou* : 10 l. (dre ar post : 14 l.)

*Santez Elizabed a Hongri* : 10 l. (dre ar post : 15 l.)

SKRIVA DA : P. EUGÈNE LE QUEAU, ROSCOFF  
C.C.P. 291-62 NANTES

## DIWAR C'HOARZIN...

gant an Tad MEDARD

GANT AL LEVR - MAN

e tremeno pep-unan  
beilhadegou laouen...

Priz al levr : 70 lur. (dre ar post : 78 lur)

Skriva da : P. Eugène LE QUEAU,  
Couvent des Capucins, ROSCOFF  
C.C.P. 291-62 Nantes

## Kelc'h lizer d'ar Vretoned

E Rosko, da genver gouel St. Iltud  
ar 7 a viz Du 1945.

Kenvroad ker,

Anat eo da bep den e vo diês bras lakaat ar brezoneg da vont e pep skol, keit ha ma chomo ar gelennerien ken diouiziekl ha ma 'z int war eur yez ha n'eo bet morse desket d'ezo, nemet war barlenn o mamm e ve.

Kenta pal da dizout eta, eo kelenn ar vistri-skol. Hounnez eo, d'hor meno, oberenn vrezonek dalvoudusa an amzer hirio, setu m'hon eus savet, gant aotre ha dindan paeroniez Ensellourien ar skoliou kristen, *eur skol-dre-lizer war hor yez*, evit mistri ha mestrezed-skol eskopti Kemper ha Leon.

Ar skol-ze a zo bet savet e miz Genver diweza, en eur mare siouaz ! ma oa risklus a-walc'h en em ziskouez Breizad. Daoust da se, mat kenan eo bet digemeret gant ar gelennerien, pa 'z eo bet heuliet araok ar vakansou, gant eur c'hant anezo.

Kennerzet gant eun taol-esa ken frouezus, hon eus adkroget gant hon labour abaoe ar 15 a viz Here, gant daou rummad skolidi : ar re a oa warlene hag ar re nevez deuet d'eomp er bloaz-man. D'ezo holl e kasomp eur gentel bep pemzek devez gant eun nebeudig deveriou. Etre an daou rummad hon devezo er bloaz-man en tu all da gant skoliad.

Gouzout a rit, avat, pegen reuzeudik eo d'ar mare-man, stad ar skoliou kristen, lamet diganto an nebeudig sikour bet root d'ezo diagent gant ar gouarnamant. En abeg da se e fell d'eomp e ve hor skol-dre-lizer evit netra. Ne gav ket d'eoc'h eo kalz d'ar vistri keiz-se, int dija ken prederiot, rei d'eomp eur pennadig eus o amzer ?

Biken, avat, n'hellfemp padout hon unan, da herzel ouz mizou bras ar skol-se, en eun amzer m'eo ken ker pep tra : benveg liesskriva, skriverez, liou, paper, timbrou... hag hon amzer... Met sonjet hon eus, ez eus e Breiz eur bern Bretoned kar-o-yez hag a rofe d'eomp o skoazell a galon laouen.

Gant ar vrasa fizians eta, eo e kasomp betek ennoc'h ar galv-man. N'eus ket eur gwir Vreizad, din eus an ano-se, ha ne vefe ket lorc'h ennan o tioueret eun dra bennak, kalz pe nebeut, evit ma vleunio c'hoaz e Breiz, yez hon Tadou, ar Brezoneg ha ne c'hell beza hepdan « Breiz ebet » evel ma lavare hor mestr karet, an Aotrou Perrot, Doue ra bardono d'e anaon.

Kasit ho prof hep dale da :

*M. V. SEITE, Directeur de l'école Ste-Barbe,  
Roscoff, Finistère. — C.C. 417.04 Rennes*

D'hon holl vadoberourien, bennoz Doue a greiz kalon gant hor gwella gourc'hemennou.

Rener ar skol-dre-lizer  
V. SEITE.